

KIS-539 – Br. plegenn, stad, load, saviad, h.a.

[Eskemm da geñver al labour renet gant Gab CHEREL war yezh ar merdeñ]

(GC da GE – 18 04 97)

Arroud eus an danvez Geriadur :

“ An div oberiezh *mettre à la cape* ha *mettre en panne* a c'hoarvez eus digreskiñ bras tizh ar vag ha war un dro lakaat ar vag da zripañ (Gl. *dériveur*) dre dunioù azas a vo displeget pelloc'h.

Disheñvel eo pal pep oberiezh avat :

Doare ur vag **a-sac'h** (troienn kinniget gant AAB da gevatal da Gl. *en panne*) zo ur saviad engortoz berrbad ken n'eus ket ezhomm dastum al lien zoken. E c'haller dibab lakaat ul levrier (Gl. *dériveur*) a-sac'h evit gortoz ul levrier all da skouer, evit lakaat urzh war vourzh goude troc'holiañ, h.a.

Doare ur vag **o kapeal** (Gl. *à la cape*) zo ur saviad gwarediñ. Ar penn bourzh a ziviz kapeal pa vez amzer re fall evit kenderc'hel d'ober hent. ”

Ha dereat eo ober gant Br. **saviad** evit ur vag ?

(GE da GC – 22 04 97)

Br. “ **saviad** engortoz, **saviad** gwarediñ ”. Kaout a ra din ez eo kevazas Br. *saviad* amañ. War ar sterva-se ez eus ur guchennig termenou : *tro*, *aoz*, *degouezh*, *stad*, *savlec'h*, *load*, *saviad*, *plegenn*... (sl. KIS-404, La-09, pp. 406 hh.). Ar c'heal atel eo ar c'heñver etre un divoud hag e amveziadoù ; keal a c'hell bezañ jedoniel, goubarel rik : reiñ *savlec'h* ur vag war ar gartenn ; a c'hell ivez gwiskañ un talvoud louere hervez meur a zerez : alvezel, bevedel, buhezel. Peurliesañ e roer dezhañ ur c'hennotadur buhezel, eleze ez emlakaer en un istor. Alese, hervez ar pouez a roer d'an divoud pe/ha d'an amveziadoù :

1° Ar *blegenn* zo doare an amveziadoù en un ampoent lavaret.

2° Ar *stad* zo an doare ma emañ an divoud pe an amveziadoù en un ampoent lavaret.

3° Al *load* zo doare an amveziadoù en ul lec'h lavaret.

4° Ar *saviad* zo doare an divoud hag an amveziadoù en un ampoent hag en ul lec'h lavaret.

Evit an *aoz* e ster arnevez Gl. *condition* a lezin a-gostez amañ : e berr ez eo *saviad* mab den intentet ent trabedel (sl. KIS-470, La-10, pp. 256-259). Merkañ ez arverer *savlec'h* ivez dre leterc'had er gedvuhez. Skouerioù :

1° An amzer fall eo ar *blegenn* ma emañ ar vag.

2° E pe *stad* emañ ar mor ? — Dirollet. E pe *stad* emañ ar vag ? — E ratre.

3° An ouf-mañ zo ul *load* repuiñ azas.

4° “

Doare ur vag a-sac'h zo ur **saviad** engortoz berrbad.”